

Dizano : **Pelerinez Remengol**  
*Modernnaet eo bet an doare-skriva*

An avel a oa yen, an douar skornet-oll,  
Penn-da-benn gand an hent e ya da Remengol,  
    Eur wregig poaur en eur grena,  
Pelerinez santel, war he zreid diarhen,  
A yee, hag en he dorn euz wialennig wenn,  
    Da di an Itron Varia.

Arru bete 'n aoter : « Deut on c'hoaz d'ho kwelad,  
Gwerhez, dre m'ho karan, ha dre ma 'm-eus soñj mad,  
    Pa deuis kenta d'ho ti santel,  
Neuze, war va daouhlin teir dro d'ho mur a ris,  
Leun euz ho karantez, gand daerou ho pedis,  
    Ma vijen mamm heb dale pell.

Kousket war va halon, a-benn deg miz goude,  
E oa eur mab bihan, eun êlig da Zoue.  
    Evel peb mamm ge he hanenn,  
Tud-koz en korn an tan a hoarze o selaou ;  
Allaz !petar 'oa din neuze kana soniou ?  
    Ar vuhez 'zo c'hwerf da dremen ?

« Red eo kaoud soudarded, ha warhoaz or bugel,  
Ma n'en-deve souden mar deut d'hen dilezel,  
    Da vrezelour 'vo kemeret ;  
Ha ni, tud-koz mantret, petra raim er vro ?  
A ! koulz e vo hada louzaouenn ar maro,  
    Dirag on dor bepred serret !

« Evid va mab em-eus greet ar pezh a hallfen ;  
Peillet em-eus uhelvar, melchon ha benterbenn<sup>1</sup>,  
    Da noz war bord eun hent distro ;  
Eur voullenn sten, er bourk, 'zo din benniget mad,  
En eur feunteun zantel eo gwalhet an dillad,  
    Ar re<sup>2</sup> warhoaz 'vo war e dro.

Eun harp koz a vanke, nerzusoh ha dousoh ;  
Va gwalenn wenn em dorn on deut beteg ennoh ;  
    N'am-eus goulou na kurunenn,  
Ni, labourerien baour, n'on-eus netra ebed,  
Koulskoude e teuom ; on anaoud mad a red ;  
    Gwerhez, c'hwi 'zo mamm ar beorien.

C'hwi 'ziwallo va mab, c'hwi hoh-eus hen roet ;  
Ne fell ket deoh e ve didud ha divroet,  
    Kaset pell euz ar menez-mañ.  
Nann, nann, ne fell ket deoh e ve 'vel hualet,  
En mogeriou eur gêr el leh na gomzer ket  
    Ar brezoneg evel amañ.

Or bugel a zo dem ! nann ! ne gredin biken  
E ve deut eur ar pred, ma ne ve em hichenn,  
    Euz an daol o tebri e damm ;  
Her gweled, evidom n'eus ket a vuhez all !

---

<sup>1</sup> benterbenn : ?

<sup>2</sup> Ar re : pere, er skrid orin.

Laouen e vez debret eun tamm bara segal,  
P'hen debr ar mab gand tad ha mamm.

« Eun deiz, o ! mamm zantel, ho mab heb lavared,  
Ha se gand beleg 'zo din gwarantet,  
Da iliz eur gêr vraz a yea.  
E glask a ree dre-oll, e hervel gand daerou,  
Evid ho tiboaniñ e kleskeh ar helou ;  
Ema amañ, eet heb enkreuz.

O ! Rouanez an neñv, ar gomz-se a glaskeh,  
En amzer ho poaniou, d'ar houlz ha ma oueleh,  
Gret m'he hlevin bremañ souden,  
Leveret d'ho mab ker, pa eo bremañ Roue,  
Penazo 'devoe eur mab a zo digand Doue,  
Brasa anken eur vamm gristen.

« Kenavo 'ta,gwerhez bet em-eus va mennad ;  
En eur gana oh braz, ha dreist pep tra oh mad,  
War-zu ar gêr en em dennan,  
Sempl e oan oh antren, o vond kuit eh on serz,  
N'ay ket kuit... chom a ray..., mez en despet d'am nerz,  
Hag e krenan, hag e ouelan.

An neb a ra ar werz 'zo kristen, 'zo Breizad,  
Hag ar vamm, hag ar mab, a oar da anaoud mad,  
Hemañ en Kêrenn eur merer,  
Da noz, en barz ar groaz, diêz a lavar,  
E tle an evurusted en-deus war an douar,  
Oll, da da batronez e vamm ger.